

# YBIS CLOP

## COMPOSET A NEVE VOAR SUJET EUR MALEUR ERRUET E LANDREGUER,

ER BLA PEVAR HA TREGONT, ER SEITEC A VIZ EVEN

### *Foar don Ynn Gouilchin.*

SPERET sanctel adorabl, disqennet eus an èe  
Da rei din guir selerigen ma c'hallin ep dalec  
Entre ma vin er bed-man, ispliea ar maleurio  
Pere, siouas! a eru em chartier hac em bro.

Er seitec a vis even, dious an nos, da c'hoech hem,  
Er guer deus a Landreguer e cheru ur maleur  
Hac en deus impouvantet qement a oa en quer :  
Implijan rin va speret evit ispliean seler.

Penos eo arruet ha ped a so tapet ?  
Gand ar pignon o coesa pevar den so lazet,  
Hac ar rest a so blesset dens un artisanet,  
E oa o tispen an ty en dens int glacharet.

Ar groague qez desolet, dre ar ru pen-da-ben,  
O clevet cur seurt maleur cruet d'ho supren,  
A desqe ho pagale pere ca egaret,  
En spourou rae ar maleur na vijent incraset.

is a vije ar galon an ini na velje  
velet diampecha ar vein deus ar plaç-se,  
a tenna an dud lazet da gas d'an hospital,  
a chortos an heur fixet d'ho lacat en douar.

Ar c'henta den so cavet e oa eur mestr touer,  
an C'henvre eo e hano , natif a Landreguer :  
foret e oll izili , bruzunet e esqern.  
O Doue ! trista maleur ha goassa planeden !

An eil ane so cavet en eur stad pitoyabl ,  
Draillet e oll izili ha beuzet en e oad ,  
Hac e benn entre daou dain , qen na goe e elpenn ,  
Ha ma eo impouvantet qément den e gompreñ.

An driet hac ar bevar so cavet en buc.  
Dont a ra ar Veleyen o clevet qement-se :  
Nouet int hac absolvet qen mont deus ar bed-man  
Dirac Jesus da recev ho setanç divezan.

An Autro ar Mær , pa glevas , en eum gayas ractal ,  
Hac en deus bet ordrenet ho c'has d'an hospital :  
Beo ha maro ac'hane voar e chir transportet  
Evit ma yijent soignet ar re a oa blesset.

Pa oue savet ar c'horvo gant ho c'hamarado ,  
Dre urz an dud a justiç , ar bobl voar ho lerc'ho ,  
Caonyet ha desolet o tonet da gompreñ  
Pen da ben ru ar pave gant goad ar gristenieu.

Pa oa poset ar c'horvo e oe digemeret  
D'ho zud ar c'heho trist-man ma teujent d'ho goelet ( )  
En eum renta a rejout eno incontinent ,  
Glac'haret hac anouyet dre un tol souprenant.

Pa veljont e oent maro , e qeviadont dioute :  
True ha compassion e oa clevet ane.  
Tud en union barset gant Doue assamblet ,  
O laret d'ho friejo qen a vo ar joaustet.

En drivoach'a vis even e zint bet enterret ,  
Tri ane en Lantreguer , en douar binniguet.  
Biscoas den n'en deus clevet q'ement-all a ganvo ,  
Hac a re'n intanvezet hac ho bugaligo.

Stracal a rent ho daouarn , criall ha deplori ;  
Caer en deus tud a sqient essa ho c'honsoli .  
Sembla a ra ho groague pa int ed en ho bê ,  
Q'en na biq'e calono qement ho aziste.

Chetu hano ar pevar en deus renjet mervel :  
Yan C'henvre , Eroan Kerne hac Augustin Pargier ;  
Ar bevoar , Hervoan Dual deus a barres Pleuyel :  
Graç ma yoint recevet er joayo eternel.

Eur grenardennic c'hoec'h vloa dre ar ru o tremé  
Sionas ! en creis ar maleur , a deuas d'e soupreñ :  
Mein a goue voar he diouar , voar an andrejo-all ,  
Pen dre da envezet an 'louarn

Doue dre e c'hraç divin en deus li preservet;  
 Tenuet eo a zindanne nemert ma voa blesset.  
 Emedi en hospital o clasq en eun oeallaât :  
 Laret a rer qerzo mar be prederet mad.

Louis ar Pon a so bet o soufr cals a boagnio;  
 Terzunes en hospital o c'hortos ar maro :  
 En sez a vis gouël e zeo bet interret.  
 Graç ma voint recevet en pales an Drindet.

*De profundis.*

An ini en deus recitet un nombr a valeurio  
 Hac a lår continui en qoit a ma vevo,  
 NAN AR GOEN & e hano , a geste Landreguer,  
 A draouien ar c'hrec'h Suliet , un apter leo deus Ker.

FIN.